



8N2-1-019

Parrez Esquibien

# Kantik Santez BERCHET, Intanvez

## Diskan :

Santez Berc'het hor mani dener.  
 Pedit evidorup hor Zalver,  
 Pedit eot ho pugale,  
 Jesus hor mestri, hor guir Doue.

1.

Ho pugale gar ho chapel  
 Kals muioc h c'hoaz e karomp-ni  
 Ar Batronez pedet enhi.

2.

Esquibianis, tri c'hant vloaz 'zo,  
 Hag ar boobl kristen tro-var-dro,  
 Daoulinet dirak ho skeuden,  
 A c'houlen sikour ho peden.

3.

Pried yaouank gant e bried  
 Goestla ra da Zantez Berc'het  
 Bizou benniget, o buez  
 Doug amzer o briedelez.

4.

D'an tad, d'ar vam, bezit bepred  
 O'skouer, o ners, Santez Berc'het,  
 Mam enorus eiz krouadur  
 Savet ganeoc'h santed a fur.

5.

Kreiz he daelou lag he enkrez,  
 Aman ive an intavez,  
 A gav isnez an Zantez vad,  
 Bet regont vloaz er menenez stad.

6.

Met, neb kristen a gles kentel  
 Grant Patronnez Landigentel,  
 Mellezour an on veredel  
 Zigor an env d'an eneou.

7.

Ez-vihanik, Jesus, Mari'  
 Vit he c'halon oa eun dudi  
 Kouls ag an deis, kouls ag en noz  
 'Vel d'an elez er baradoz.

8.

Lezel dre guz leac'h ar repos,  
 Var goat kalet, pedi en noz :  
 Souezussa tra ! ar binjen  
 Blijie kenan d'ar plac'h kristen.

9.

E ti he zad, eb mank ebet,  
 Gant feis dispar, an daou bried,  
 Servicherien a bugale,  
 An offeren gievant bemde.

10.

He zad, gouarnour er Zued,  
Pen an arméou a oë savet ;  
Bep sun kovez a beb gwener  
Kalon digor ro d'e Zalver.

11.

Abred intanv, e ped Doue  
Da gennenza e volonté,  
E vere'hik keaz a gass da bell  
Fiziet en eur voëreb sanctel.

12.

Neuze Berc'het d'he unnek vloaz  
A glevaz prezeg var ar groaz  
A diskleria ar Bassion  
Ma zaou-hanteraz he c'halon.

13.

D'an noz varlerc'h 'velaz Jesus  
Gwisket en he c'hoad truezuz.  
« Setu amai he Mectr divin,  
» Va merc'h Berc'het, sellit ouzin. »

14.

— « Va mestr divin, eme Berc'het  
» Va Zad, va Zalver benniget,  
» Abers piou emaoe'houi a-ze ?  
» Perak emaoe'houi er stad-se ? »

15.

— « Mé zo er groaz dre drugarez  
» Evit pecherien didruez  
» Evit tud dall a tud ingrat  
» A zisprij re va grassou mat. »

16.

Gwelet Jesus en e hoaniou  
Wask he c'halon darz he daelou  
Gwela reio bet' he maro  
Bevech goude ma zonj ennho.

2

17.

D'he c'houezek vloaz oe dimezet  
Da Ulfon, a ouén ar brinset.  
Dre zentidigez vit he zad  
E timezaz a galon vad.

18.

Met, kent bannet abers Doue  
Varnezho daou e volonté,  
Epad daou vloaz chomet oënt-hi  
Vel breur a c'hoar er memez ti.

19.

Eul loden gaer euz ar Zued  
Zo dindan galloud he fried :  
Gouarn he danvez vit mad ar paour,  
Dalve dezhi gwelloc'h get aour.

20.

Vit an dud kianv, hospitaliou,  
D'ar heorien geis ho sikouriou,  
D'ar vugalec, skolion kristen,  
Setu, Berc'het, hoc'h aluzen.

21.

Tud kianv, tud coz, tud afflijet,  
Ententit outo gant respet :  
Ma tec'h an dud ouz an dud keis,  
Trec'h d'an donjer ez-eo ho feis.

22.

Her galv ar Roue d'e balez  
Vit var bep tra beza mestrez ;  
Met he c'homzou, siemmuз, hardis  
Var an dizurs a sko a dis.

23.

Divar dizurs a brezellou  
Diroll a ra pounner kargou :  
Rust, an Introuн a zav he mouez  
Mä vo d'ar bobl skanveet o fouez.

3

24.

Vit he breudeur kalon tener,  
Henvel ouz Jesus hor Zalver ;  
Met evithi ne glasko ken  
Nemet binez ar binjen.

25.

Beleien fur her c'helene,  
Ato sentuz var hent an Ee.  
Jesus 'lies 'gomze outhi  
Vit he c'helenn ag he deski.

26.

Kouls ag ar brassa doctoret,  
En Ilis santel n'euz skrivet  
Leoriou ken kaer ha ken buel !  
Komzou Jesus, egleo fidel.

27.

Var urs he Zalver benniget,  
Lizir 'sknive d'ar Pabet  
En Avignon dalc'het neuze,  
« Da Rom en dro it alesse. »

28.

Vikel Jesus zistro da Rom,  
Leac'h n'euz Berc'het urs mont da  
E Rom eta bet' he maro [jom.  
Pemp ploaz varn'gent 'labourou.

29.

Leac'h n'euz savet e Aviel,  
Jesus her blein 'raok he mervel ;  
En he c'hosni a reio c'hoaz  
Var menez Calvar hent ar groaz.

30.

Esquibianis, pebeuz enor !  
Pelerinet, pebeuz tenzor !  
Vit hou diouall euz ar pec'het,  
Kaout relegou Santez Berc'het.

31.

Tud yaouank a tud dimezet,  
Tadou, mammou, intarvezet,  
Sellit piz ouz ar Zantec vad,  
Mellezour parfet a bep stad.

32.

Deskit dreist oll gant hor Zantec  
Karet Jesus ag ar Verz'hez,  
**Karet Jesus, Ilis Doue :**  
**Evitho n'euz roët he bue.**

33.

Santez Berc'het, hor mam dener,  
Pedit evidomp hor Zalver,  
Hon diouallit deis a noz  
Ma z'aimp ganeoc'h d'ar baradoz.

AMEN.

Quimper, le 21 Août 1923.

P. MESSAGER,  
vic. GEN.

**Pardon Santez Berc'het, e parrez Esquibien, a vez great bep  
bloaz d'ar zul kenta a vis Gwengolo.**

Kemper, moulet e ti de Kerangal.